

# Kantik Itron Varia Kerellon

VAR DON : *Ittron Varia Lambader*

Itron Kerellon, hor Mamm ger,  
 C'houi zo ker mad enn hor c'henver,  
 Ma caromp sevel hor mouëziou  
 Da gana ho meuleudiou.

Brud evurus ho trugarez  
 Pell zo a red dre ar barrez :  
 Ann eil rumm a zesk d'eguile  
 Ho madelez a bep **mare** .

Eur wers a **zoug** kalz burzudou,  
 Da ziarbenn ar goall-eùriou,  
 Grëat, ô Mamm garantezus !  
 Dre nerz ho prëac'h galloudus.

Mes, evit holl o niveri,  
'Ve red counta bûez pep hini :  
Rag-ze Plouenanis bepret  
Ho karo, Guerc'hez benniget.

Ar vamm pleget var ar c'havel  
A gan ho kantik d'he bugel ,  
Hag ann den e pred ar maro  
A lavar c'hôaz oc'h hano.

Ni lenn Doue var hor meaziou ,  
Hag e glazder bolz ann Envou ;  
Var c'ched d'ann Env ganeoc'h sevel,  
Ni gar hor bro hag ho chapel .

E pe du mont enn hon anken  
Ma na rëdomp enn ho kerc'henn ?  
Poaniuz meurbet ve d'hor c'halon  
Diouër ho ti a Gerellon .

Dre gozni e venne koueza  
Evel holl draou bresk ar bed-mâ.  
Hor guennek zo ëat laouen;  
Eman rentet dress ha kempenn.

Dirag ho skeuden benniget,  
Poblou a-bez o deuz stouet;  
Joa e ganeomp he ~~guelet~~ c'hoaz,  
Hirio kaëroc'h eget biskoaz.

Enn ho chapel e tesk-buhan  
Ar bugel kerzet e-unan ;  
Astennit dezhan gant evez,  
Ho skoazel epad ar vuez.

Ni a fell deomp beza fidel,  
Da heul ho roudou, Mamm Zantel :  
Gant nerz-kalon ni a gerzo,  
Dre'r memez hent d'ar memez Bro.

Oc'h unan beillit deiz ~~ha~~<sup>la</sup> noz  
D'hor c'hass ganeoc'h d'ar Baradoz,  
Ma velimp holl ho tremm skedus  
E kichen trôn ho Mab Jesus.

J. Falchun  
Vicaire à Plouénan

*Imprimatur :*

PLEYBER-CHRIST, DIE 5 MAI 1907.

F. VIEILLE-CESSAY,

Vicaire - Général

Morlaix Imp. Le Goaziou